

17.8  
MERZERINTI

# SANT LORANS.



War don : *Ele ann env, deut d'ann douar,*  
pe donio 9, 25 ha 27 Dom Herry.

Ann otro sant Lorans merzer  
A zo mad he gemer da skouer  
Ha rei da Zoue eveltan  
Eun hon c'halon al lec'h kentan.

O ia ! Kristenien, her c'hredet,  
Dreist da gement tra zo er bet  
Sant Lorans mad hag evuruz  
En deuz bet karet he Jezuz.

*Josephine De. Chavon*

Skler walc'h en deuz-an diskoueeet  
Ann deiz oa bet merzeriet ;  
War dan ar bourrev a drec'he  
Ann tan euz karante Doue.

Ann dekved a viz est, enn Rom  
Elec'h oa d'ar c'houls-ze o chom ,  
Bla daou c'hant eiz hag anter kant,  
D'ann deiz-ze e varvaz ar zant.

Gwall vrezel oa neuze c'hoari :  
Valerien , ar mac'her kri,  
En devoa laket enn he benn  
Lazan dre-oll ar Gristenien.

Pa roaz urz d'ho frizonian ,  
Ar Pap santel er penn kentan ,  
Da c'hortoz bean bourreviet,  
Sant Lorans a oa gwall nec'het.

Gwelan re leiz he zaou-lagad  
Ha derc'hel da grial : « Ma zad,  
« Ma c'haset genac'h d'ar maro  
« M'ho heulinn beteg enn Envo. »

Ar Pap respontas evelenn :

« Ma map, beet dinec'h agreñn,  
« Ar pezh hoc'h euz c'hoant a vo groet ;  
« Abenn tri devez em heulfet ;  
« C'hoaz zoken ho merzerinti  
« Vo kaeroc'h evit ma hini ;  
« Rak kreiz ho nerz oc'h c'houi, map ker,  
« Ha d'am noad koz e tinerzer.

« Distroet buan war ho kiz,  
« Klasket mat danve ann iliz  
« Ha lodennet oll d'ann dut paour,  
« Ann ed, ann arc'hant hag ann aour.»

Ar zant penn da benn a zentaz,  
Ha chetu raktal e teuaz  
Unan abeurz Valerien  
Hag a laraz d'ar Gristenien :

- « Genac'h chomo ann Aviel,
- « Ho pern komjo kaer ha santel,
- « Red vo d'ac'h, vat ! rei ho madô
- « Da Valerien, ma otro.

Sant Lorans laraz evelenn :

- « N'ho po ked ane eunn eskenn :
- « An traou-se oll zo et d'ober
- « Aluzenno, ma otro ker. »

Ann den-ze a iez droug ennan

Pa glevaz ar c'helou fall-man,

Ken a laraz garo spontuz :

« Lorans, dinac'het ho Jezuz.

- « Ne n-oc'h ket hep bean klevet
- « Eo bet d'ann oll gourc'hemennet
- « Gant Valerien, ma otro,
- « Dont d'ezenzi hon doueo. »

Sant Lorans respontaz buan :

- « Otro paour, koll a ret ho poan,
- « Rak me enn bev hag enn maro
- « Vo Jezuz hep ken ma Otro.

- « Biken ezenz digenin, vat !
- « N'ho devo ho skeudenno koat,
- « Koz doueo a rann goab nhe ;
- « Hi vo diskaret hep dale.

- « Daoust d'ho c'haerder a ziavez
- « N'ho deuz ked a c'halloudegez ;
- « Ann diaoul hell ho kas oll gantan,
- « Ha marteze c'houi ar c'hentan. »

War ze teuaz gand ann treitour :

« Lorans, eme-an, komzer flour,

« Traou walc'h hoc'h euz laret din-me :

« Ne chominn ket pell enn ho tle.

« Prim aman, potred ; c'houeet tan,

« Eunn tan na zevo ket buan,

« Eunn tan a boac'ho divalo

« Ma bado hiroc'h he boanio. »

Sant Lorans eunn tammik goude

Peuc'huz war he c'hrill a lare :

« Ann tu-man, otro, zo poaz mat,

« Troet egile da boac'hat. »

Goude c'hoaz laraz evelenn ;

« Tanvaet kig ar Gristenien

« Evit gout, mar keret dibri,

« Ha gwelloc'h eo poaz evit kri. »

Soufr a reaz enn gwir Gristen  
He verzerinti penn da benn  
Kalonek mad, hep klemm ebet,  
Ken a oa ann oll souezet.

Dre ann toll krenv-se ar Romiz  
Oe peur-c'honeet d'ann Iliz,  
Ho foz doueo diskaret :  
Sant Prudanz hen deuz lavaret.

Otro sant Lorans gallouduz,  
Teurveet goul digant Jezuz,  
Ha digand he vamm ar Werc'hez  
Gras ma varvimb er zantelez.



## AOTREADUR.

*Merzerinti Sant Lorans* aotreomp vo moulet ha goneet daou-uguent devez Induljanso bep tro ma vo kanet gant fe.

Sant-Briek, 13 a viz Here 1865.



† **AUGUSTIN,**

*Eskop Sant-Briek ha  
Treger.*